

Perrot Jean-Marie (Plouarzel 1877 – Skrignag 1943)

En o eil bugaleaj : bet embannet e 1928.

Modennaet eo bet an doare-skriva.

*

Pez farsuz, en eun arvest, savet e kembraeg gand R. G. BERRY, ha troet, dioutañ, e brezoneg, gand Y.-V. PERROT ha GERAIN DYNALLT OWEN, e testeni euz an unanvez striz a zo etre Kembre ha Breiz-Izel.

*

Ar pezh-mañ a zo bet c'hoariet evid ar wech kenta e Bleun-Brug Lezneven, d'ar 6 a viz Gwengolo 1928.

Stephan Boucher a ree Per.

André Pronost, Nath ha M. A. Roudaut, Mallt.

*

C'hoarierien

Per David

Nathanael Yann

Daou genderv koz, bet kabitened war vor gwechall, hag ugent vloaz a zo o veva diouz o danvez.

Mallt, merh Per.

*

Sklêrijenn

Evid c'hoari ar pezh-mañ eo red kaoud eur zal kempennet kaer a vo enni eur piano, diou gador vourret, eun daol vraz, e kreiz, hag ivez, a-gostez, eun daol vihannoh da hoari, eur gartenn vraz, war ar speurenn, dirag ar zelaouerien ; eun nor, en tu kleiz, a sko war ar gegin, hag eun all, en tu dehou, a sko war an hent. Pa zaver ar gouel, Mallt a zo o lakaad he dillad da vond er-mêz : he zad, eur zae hlaz gantañ, a zo o labourad, war eul lestr, ouz an daol vraz hag en-dro dezañ ema e vinviachou.

A-wechou, marteze, an hini a raio Mallt ne ouezo ket c'hoari war ar piano, med neuze eun all a hell c'hoari eviti a-dreñv kein ar speurenn pe a deuiio zoken euz ar gegin, galvet ganti, da hoari, en he leh, war al leurenn.

EN O EIL BUGALEAJ

Mallt

(o lakaad he zok war he fenn)

Mond a ran d'ar red, da gas al lizer-mañ, d'ar post, a-raog ma vo serret ar stal. Daoust ha dond a raio va eotr Nath amañ, adarre, fenez ?

Per

Dond a dle peogwir emañ ar yaou ;peurlies a teu d'or gweled d'ar meurz ha d'ar yaou da noz.

Mallt

Hag ho pag, penaoz ez a an dro ganti ?

Per

N'ez a ket re fall ; med ne vo ket peurhreet c'hoaz en deizou kenta-mañ.

Mallt

(o lakaad he manegou)

Hag ho mouchouer-godell, braz a-walh eo da ober ar pezh a vennit ober gantañ ?

Per

Eur mouchouar-godell, e hellez kredi, n'eo ket braz a-walh da ober oll goueliou eur skouner evel houmañ.

Mallt

Ped gouel a zo ezomm 'ta ?

Per

Eur bern : ar gouel braz, ar gouel misan, ar gouel stae ha me 'oar-me !

Mallt

Che ! med eur vag evel-se a rank kaoud muioh a zillad eged eur verh yaouank.

Per

Anad dit, avad, ha neuze eur vag a zo eur stlabez merh ha kenetrezom bleizi-mor, ni a oar vad e rankom tremen diouz or bagou evel ma tremener diouz ar merhed ; goude ober brao dezo, hag o hennenn hag o ficha euz ar gwella, e vezer lakaet nehet a-walh ganto c'hoaz, meur a wech.

Mallt

E gwir ! med, va zad, daoust ha ne vije ket eun tamm mad gwelloc'h deoh en em lakaad da lenn eul levr bennag, bemdez, goude ho merenn, eged chom aze, war ho skaoñ, e-pad an hanter devez, gand eur hoz c'hoariell vugale ?

Per

(Eun tammig kintou ennañ). Eur hoariell ? eur hoariell ? houmañ n'eo ket eur hoariell eo ! ha neuze, kabitened koz, eveldom-ni, hag o-deus greet tro ar bed, n'eo ket êz gouzoud ped gwech, n'o-deus ezomm da lenn netra ebed ken.

Mallt

Mad, va eontr Nath a gar lenn koulskoude !

Per

Nath ? Me a oar vad e vez e fri atao en eul levr bennag hag ouz eul levr a lennan e lenn kant, med n'em-eus ket aon o lavared amañ pa n'eus nemedom on-daou, ne oa ket eur seurt den an Nath-se pa oa kabiten : kalz re droet 'oz ouz ar varzoniez ha traou all didalvez evel-se. Red eo beza ganet kabiten evid beza eur habiten mad ; ma n'emañ ket an dra-ze, en ho kwad, eo didalvez deoh klask en em gaoud, rag n'en em gavoh ken.

Mallt

Beh am-eus o kredi an dra-ze, med hervez ar re goz avad eo red beza bet ganet barz evid beza eur barz mad.

Per

Pebez sorhenn ! Ar folla den a zo o vale a hell dond da veza barreg da renka e heriou, e werziou, gand ma ne ray nemed an dra-ze e-doug e oll amzer.

Mallt

N'it ket da lavared an dra-ze, gand a reoh, dirag va eontr Nath.

Per

N'on ket ker sod-ze, rag me a oar vad eo buan a-walh da eontr Nath da vond droug ennañ.

Mallt

Eñ a lavar, koulskoude, eo c'hwi an hini n'en-deus tamm ludu ebed da holo e dan.

Per

O ! ne dele ket beza kalz a gemm etrezom ha neuze, an oll a oar peger gouez eo ar bleizi mor, med, va hredi a hellez, n'om ket evid derhel droug, pell amzer, an eil ouz egile. (*Selled a ra ouz e voñtr*). Asa ! asa ! med mall eo da Nath koz diskenn d'an douar adarre pelloh.

NATH, MALLT, PER

Nath

(o tond en ti hag o selled ouz Mallt gand eun doare goapauz)

Doue d'ho pennigo, Per ha c'hwi ivez Mallt, bleunvenn gaerra an ti-mañ. N'eus ket eur penn-kristen o c'hoarzin, war an hent, en abardaez-mañ : re yen an oll eo an amzer da lakaad ar fri er-mêz.

Per

N'eus nemed tud koz, eveldoh-c'hwi, Nath, hag a gavfe e ve yen hizio ; ar re goz n'int nemed koz traou skornet.

Nath

Malltig paour, daoust ma 'm-eus gwelet oll borziou daou du an douar, n'em-eus ket gwelet biskoaz eur verh, ker kaer ha te, rag ma 'm-bije kavet unan p'edon en oad da zimezi, biken ne vijen chomet da ober ar paotr-yaouank-koz, evel ma'z on. Bremañ ez eus daou-ugent vloaz, em-bije baleet diarhen, war an erh, evid gweled eur verh heñvel ouzit-te !

Mallt

A ! ba ! ba ! ba ! Roit peoh d'am penn, sellit, gand ho stranerez ; me bremañ a zo ivez
eur plah yaouank-koz diazezet,
ha ne hoarz den ouz he gweled.

Mond a ran beteg ar post, med gand a reoh, n'it ket d'en em daga keit ha ma vezin oh ober va zro ; taolit evez mad ho-taou, war ar pezh a lavaran, pe ho-po da ziwall ouzin.
(Mallt a ya er-mêz).

NATH ha PER

Nath

Hounnez, sell, a zo heñvel ouz he mamm.

Per

(a gendalh gand e labour)

Daoust pegen heñvel eo ez eus kemm etrezo.

Nath

Eur vaouez dibabet etre mil 'oa Maharid, da wreg.

Per

Heb mar ebed.

Nath

(O tenna e vantell hag ouz he lakaad a-ispill ouz an nor. Kemered a ra eur hornad butun diwar ar chiminal ha lakaad a tan warnañ, gouestadig.)

Gweled a ran emañ o strani gand ar goz bag-se, adarre !

Per

Adarre ! adarre a zo eur rebech ; ne vezan ket atao warni ; ne labouran nemed, gwech ha gwech, pa dro em fenn.

Nath

Pa venn eun dra, a-benn e teu atao,
evel ar ganevedenn hag ar glao !

Per

Petra 'leverez euz va labour ?

Nath

(o lakaad e lunedou a zell ouz al lestr evid kaoud abeg ennañ)

Ne welan ket o klask ober petra 'n diaoul emañ aze ?

Per

(droug ennañ)

Eul lestr, na petra 'ta !

Nath

Ya ! ya ! Me a oar an dra-ze, brao-braz, med bez'e ez eus kement a listri disheñvel, war ar mor, hag a girri disheñvel a zo war an douar : Kaoud a reer kirri dre dud ; kirri dre gezeg, kirri dre dan, bez'e eus ivez listri dre dud, listri dre oueliou, listri dre dan : bagou, yaktou, skounnerou !...

Per

(o troha warnañ a-daol-trumm)

A ! kreñv, teod abeguz ma'z out ; n'ez ket da forani da avel, en doare-ze 'ta, heb ezomm ; me a ouie, ervad, an anoiou-ze, a-raog ma oa savet barvenn ebed dit c'hoaz war stal ar mehi.

Nath

(o tenna e lunedou).

Asa 'ta, mad, perag ez a droug ennout evel-se ?

Te eo ez-peus goulennet ouzin, da genta, barn da labour.

Per

(tomm dezañ)

Perag, genaouog, out eet da zelloud outañ, a-raog beza sur pe eul lestr, pe eur hañval e oa !

Nath

(hegaratoh)

Ar hañval ? A ya ! hennez eo lestr trêzou hir ha tomm an Afrik, n'eo ket 'ta, Per ? *(Lakaad a ra e lunedou adarre, war e fri, da ober eur sell all ouz al lestr).*

C'hoant am-eus da lavared n'eo ket greet gwall gaer c'hoaz al lestr ganez, rag n'on ket evid anaoud ennañ, diouz eur gwel, ar penn a-raog diouz ar penn a-dreñv.

Per

(garo)

Ken êz eo koulskoude lakaad kemm eter an daou benn-ze ha ma'z eo lakaad kemm etre da fri ha da helgez¹-te !

Nath

Va fri-me, evelato, n'eo ket keit hag hini al lestr-se !

Per

(eet anezañ e-unan)

Ro peoh, d'am penn, pelloh, sell, rag skuiz ez an ouz da gleved ; deviezennou a vez ne heller tenna netra euz da glopenn, nemed bidanellerez, evel euz genou eur foll, er foar !

Nath

(o lakaad e lunedou er voest)

Ne fell ket din klask trabas ouzit, en abardaez-mañ, med, ma rez diouzin eh astennin, eun tamm da wern gorn.

Per

(o lezel e gounnar da goueza)

Komz a rez hep c'hoarzin ?

Nath

Ya ! ya ! ro dezi eur meutad c'hoaz, eur meutad mad.

Per

(o selled ouz al lestr)

Ya ! ya ! gwir a-walh a levez ha goude ne vo ezomm gwern all ebed ken warnañ. A ! mad ! a-walh em-eus labouret hizio.

(Dastum a ra ar benviachou, war an daol vraz, hag eh azez, gand e gorn-butun, e-kichenn Nath).

¹ helgez : lienenn al lagad.

Nath

Sur a-walh e tle beza yen, war ar mor, er pardaez-mañ.

Per

Me 'gred ivez. Ne ouezez ket, Nath, ez eus ugent vloaz, er miz-mañ, m'on-eus kuitaet ar mor on-daou.

Nath

(o prederia)

Ugent vloaz, ya ! gwir eo ! Koun a deu din euz a eun dra a zegouezas ganen pa oan o tond euz a Hong-Kong evid ar wech diweza.

Per

Ha me euz a Vuenos-Airus.

Nath

(o prederia)

Ugent vloaz !

Pe oad ez-peus-te, Per ?

Per

C'hwezeg vloaz ha tri-ugent ; eur miz kosoh egedout.

Nath

Doue ra viro an oll gwiribunan ! Kant hanter-kant vloaz a reom etrezom on-daou ! E gwir, oajet braz om, paotr paour ! emao war or seulieu koz ! Mad e vije deom klask louzou da bellaad an Ankou.

Per

N'ez ket da lavared ano c'hoaz euz ar maro. A-drugarez Doue, emao atao war ar vourz, gand avel greñv, en on diskouarn ha c'hwez vad ar mor en on difronn.

Nath

Daoust hag huñvreal a rez a-wechou er mor ?

Per

Pa huñvreal, peurliesa, eo er mor eo eh huñvreal.

Nath

Me, en derhent deh da noz em-eus bet eun huñvre... spontuz... Eur barr arnev a oa kouezet war va lestr, *ar Roue Arzur* ; hennez 'oa e ano, ma 'peus koun.

Per

Eul lestr mad al lestr-se, paotr paour !

Nath

Ya, trei a ree em huñvre, gand an avel, evel eur gornigell ; evid troha berr, kaoud a ree din edon, va-unan, o neuñv war an tonnou c'hwero, ha pa dalv, pa zihunis, edon, dindan va gwele, war leur zero ar zolier.

Per

Ar *Roue Arzur* 'oa al lestr diweza az-peus sturiet ?

Nath

Ya ! ya ! n'az-peus ket ankounac'haet an taol souezuz a en em gavas ganen daou vloaz araog ma'z is diwar ar mor ?

Per

War vourz ar *Roue Arzur* eo edos neuze ?

Nath

Ya ! ya ! da lestr-te, ar *Priñs-Albert* hag ar *Roue-Arzur* a dremenas harp an eil en egile e-kichenn Sant Domingo.

Per

Ya ! ya ! paotr paour, souezuz-braz 'oa an dra-ze, mez kement-se a zegouezas e-kichenn Jamaïka, evel ma ouezez da-unan.

Nath

A ! nann, avad, e-kichenn Sant Domingo eo !

Per

Nann ! a lavaran dit ; e-kichenn Jamaïka eo, Nath.

Nath

Asa evelato, perag out ken taer ha ma'z out ? Al leh-se a zo chomet moulllet em spered. Lakaad a rafen mil lur e glaoustre eo e-kichenn Sant Domingo eo.

Per

(o tomma)

Laka mil lur ma kerez, med me a zo ker sur ha te eo e-kichenn Jamaïka eo e tostaas an daou lestr an eil ouz egile. Deus ha m'hen diskouezo dit amañ, war ar gartenn, ha ne vo ket pell an dale.

Nath

N'her proui biken !

Per

Ma hellan hen ober, war ar gartenn, e kredi, goude-ze, 'michañs ? *(An daou goz a zav, pep hini war e gador, dirag ar gartenn hag a laka o lunedou).*

Nath

Gortoz, ma tiskouezin dit, Per ; ar *Roue Arzur* a rede gand avel mervent greñv, amañ endeeun *(gand garr e gorn e tiskouez al leh)*. – O tond euz a Guba edon, el leh m'oan bet o karga marhadourez. Setu amañ peleh e oam pa oam tosta da Zant Domingo.

Nath

Anad eo e kollez da spered vad, paour-kêz koz !

Per

(droug ennañ)

Daoust ha gouest out da houzoud hepken petra 'lavarán.

Nath

(ken droug ha Per)

Te eo da vihannañ a zo eet e belbi.

Per

Evelato, diwall ouzin, ma kendalhez da lavared geriou flemmuz, evel-se, din ! *(Diskenn a ra diwar e gador)*.

Nath

Te eo a vez da genta o karza da gornailenn abaoe m'az anavezan ha goude-ze e klemmez c'hoaz ! Pren eur weskenñ vad 'ta da weskenñ da wall imor. *(Diskenn a ra ivez d'an douar diwar e gador)*.

Per

Va gwall imor ? va gwall imor ? ha da hini-te 'ta ? a zo evel ki eur fuzuill a gouez hag a lak an tan er poultr d'an disterra mouch-avel a hwez warnañ. Daoust pegement a zroug a zo ennout n'em-eus ket a aon o lavared dit eo e-kichenn Jamaïka eo ez edom.

Nath

Ha goude e youhfes Jamaïka, Jamaïka e-pad bloaz, an dra-ze ne viro ket e oam e-kichenn San Domingo. Gwasa pezh a zo pa ya eun dra bennag, en da benn-te, out diêsoh da lohad eged ar Pol Nord. A ! kreñv ! penn kaled, ken !

Per

N'eus forzh pegement e youhi, me eo kabiten ar vourz-mañ hag e vin ! *(Diskouez a ra leuz ar zolier gand e zorn)*.

Nath

Dalh da vourz ganez evid atao ha peogwir emañ an traou evel-se n'az-pezo ket a ezomm ken da skuba da di war va lerh-me, klevez a rez ! *(Mond a ra war-zu an nor da wiska e vantell)*.

Per

Me a en em grougfe ma 'm-bije ket gwaz imor ha ma'z-peus-te !

Nath

(o tigeri an nor)

Sell 'ta, te n'out ket bet eet biskoaz da 'n em grouga daoust ma'z-peus eun imor mil gwech gwasoh eged va hini-me. *(Dres p'ema o vond er-mêz, Mallt hen sach en ti en despet dezañ)*

MALLT, PER, NATH

Mallt.

N'ho-peus ket a vez, ho-taou ? Daou genderv, bet troet atao, mantruz, an eil ouz egile, o vond d'en em randaelad, diwar netra, evel daou Iwerzoniad. Gand ar vez, da vihannañ, ehanit da vouzad an eil ouz egile, daou zen koz evelдох, o tenna war o fevar-ugent vloaz.

Nath

(o tond ennañ e-unan)

Pevar-ugent ? Gedit ma vezin c'hwezeg ha tri-ugent, da genta, da vihannañ, merh paour ?

Per

Gweled a rez, Mallt, o lavared edo e oam e-kichenn San Domingo !

Nath

Nann ! nann ! eñ eo a lavare edom e-kichenn Jamaïka.

Mallt

Nao doubl oufft² deoh ho-taou ? Azezit war an diou gador-ze. *(An daou gêz koz a azez hag evel eur medisin Mallt a gemer arzorn Nath da weled penaoz e kerz ar gwad).* Bremañ ho kwad a vale dresohig. *(Ober a ra kemend all da Ber).* Hoh-hini-c'hwi a sko c'hwezeg taol ha tri-ugent peb munut.

Nath

Da lavared eo e sko, evid pep hini, hervez e oad.

Mallt

Mad ! lezom Sant Domingo ha Jamaïka el leh m'emaint ha peogwir eo sioullaet ar mor, bremañ, e sonin, deoh, eun ton pe zaou, war ar piano, a habaskaio an oll sperejou rag ezomm o-deus. *(Mond a ra d'ar piano hag e c'hoari "HELA 'n YSGYFARNOG » ; an daou goz, ar o azez, a zelaou en habaskter : pa hoari Mallt an ton e weler Nath oh ober an neuz d'her c'hoari ivez gand e droad).*

² oufft : ?

Hela 'r Ysgyfarnog

Hela 'r Ysgyfarnog

Buan.



Dowch i'r hel - la, mae'r ud-gyrn yn ca - nu, Yr haul ly - ga - da dros
ys-gwydd y bryn ; Draw i'r dar - ren mae pawh yn ym - dy - reur
A'r ad - sain ddef - fry dan-velweh y giyn : Hel-wyr a hel-gwn a
hel-feirch af - flo - nydd Ha. ha ; mae yr awyr yn blann o fl-vyn-had,
a tempo
clyweh mae'r cwn we - di ta-ro y try-vydd, Mae'r hen fy-tenad yn ar-wain y gad

Nath

An ton-ze, Malltr vihan, am yaouanka euz a dri-ugent vloaz hag am laka da reded e liorzou hag e mêziou Trewern.

Per

War a welan e skoez an ton gand da droad, heb gouzoud dit.

Nath

N'az-peus ket ankounac'haet c'hoaz Nel an Ti-meur ha Sara ar Wern ? N'o-doa ket o far evid lakaad laouenedigez er panteou ma vezent enno. Ar ganaouenn-ze a deue ganto aliez.

Per

Ankounac'haet ? Med biken ne hellin ankounac'haad an amzer-ze ; Mallt, c'hoari 'ta an ton-ze eur wech all c'hoaz ! (*Mallt a hoari hag an daou goz a sko an ton gand o zreid*). E peleh emañ Nel fenoz ?

Nath

D'an Amerika 'oa eet ahanen. Sur a-walh e tle beza dindan eun daouarheg bennag, ar reuzeudig 'zo anezi ! meur a vloaz a zo ! E feiz ! hounnez a ouie an tu da zacha warni sellou oll yaouankiz ar barrez-mañ.

Per

Sara hag hounnez a oa diou bebrenn.

Nath

Ha lavaret em-eus bet dit, eun dro bennag, em-oa gwelet Sara, warlene, e Feunteuniou ?

Per

Ya ! ya ! hag az-poa he havet kosaet kalz.

Nath

Ouspenn daou-ugent vloaz a oa abaoe ma n'am-oa ket he gwelet ; deut eo bremañ da veza treud ha goulou he daoulagad a oa gwechall kel laouen ha diou steredenn a zo hanetr-varo, bremañ, en he fenn ; he bleo du rodallet ker kaer a zo gwenn ha tano. Ker mud ha kloh ar glaz e teuis da veza pa welis dirazon Sara ar Wern, ar verh kuñv evel lêz ha glan evel erh, a zo bet diframmet diganti he oll gened gand an amzer, al laerez koz 'zo 'nezi.

Per

A ! paour-kêz Sara ; me 'gred eo deh eo em-eus he gwdelet hi ha Nel, o...

Nath

Per vihan, n'ez ket da zigeri beziou an deiziou termenet (*huanadi a ra*). Pegen berr eo ar vuhez zoken an hirra ha p'en em gav an den war dreujou e bevar-ugent vloaz, en aner eo e klask laouenedigez e yaouankiz :

Ar yaouankiz 'zo eur boked

Ar haerra 'zo er bed !

med peger buan e teu da weñvi !

Per

Mallt, c'hoari deom bremañ ar "Gwiniz Gwenn", eur wech c'hoaz, rag, ma ne garom diwall, da eotr Nath a zo o vond da goueza war e benn, e poull ar velkoni. (*Mallat a hoari ton ar werzenn genta*).

Diwaller ar gwiniz gwenn

Dioualler ar gwiniz gwenn (Buĝeléo 'r gwenith gwyn)

Gouestat ha gant kalz a galou

Andante

Me zo eur pao - trig yaou - ank foll, Di -
bre - der, war va me - no, Di - ouall a ran ar
gwi - niz gwenn, Met eun all eo o me - do. Pe -
rak ne deu - fec'h ket d'am beul # greiz ka - lon ho
ka - ran, Rak seul - vui m'ho ta - rem - pre - dan. Glan -
noc'h glan - na ho ka - van.

Nath

An ton-ze, evel oll doniou Kembre, a laka or spered da nijal war-zu douar kuñv or havell hag hentchou mell or hammejou kenta.

Per

Gwechall, pa oas e-barz da vrud, e vezes klevet aliez o kana ar *Gwiniz Gwenn*, en eistezfodou, med bremañ ne vezez ket gwelet ken o tigeri da henou.

Kan deom eul linenn bennag.

Nath

Doue 'r'ho miro oll, va zud vad, med va mouez-me ne oar nemed gwigourad evel rod eur harr ha n'eo ket bet lardet pell a zo.

Mallt

Va eontr, grit eun êsa atao, da weled.

Nath

Ya ! ya ! poz kenta ar *Gwiniz Gwenn* ; med taolit evez ha n'it ket re vuan en aon na zialanfen : *four knots an hour*.

Mallt

Stagit, da genta 'dal ma 'm-bo roet deoh an notenn genta. (*hag e c'hoari*)

Nath

(*diwar e azez e kan gand mouez wan eun den koz*) :

Me 'zo eur paotrig yaouank foll
Dibreder, war va meno,
Diwall a ran ar gwiniz gwenn
Med eun all eo o medo.
Perag ne deufeh ket d'am heul,
A-greiz kalon ho karan,
Rag seul-vui m'ho tarempredan.
Glannoh-glanna ho kavan.

Per

Braoig e teu ganez c'hoaz !

Nath

Nann ! Ar vegin ennon a zo devet, e heller da lavared, Per goz !

Mallt

Bremañ, va zad, deoh-c'hwi eo kana an eil poz.

Per

(*skiltr hag o krena*)

Tra ma vo sall an dour er mor,
Tra ma vo brug er menez,
Ha tra ma vo kalon em hreiz
Az karin, va fennherez.
Lavar din an traou oll, war-eeun,
Ha n'am lez ket da zounna,
Pe me pe eun all eo a zo
En da galon an donna ?

Nath

Mad, paour-kêz, m'ne-divije greet peb a zolo, n'on-divije ket gounezet ar priz : eur solo kaer, med kanet fall.

Mallt

Mall eo din bremañ mond da aoza eun dra bennag da goan evid Sim Reeves hag Eos Morlais. (*Mond a ra er-mêz*).

NATH ha PER

Nath

E feh³, n'ouzon ket petra am-eus, er pardaez-mañ, med gweled mad a ran eo Mallt portred beo he mamm Marharid.

Per

E hell beza ! Me ne welan ket an heñvedigez-se koulz ha te, dre m'emaon bemdez o veva en he serr.

Nath

Gouzoud a rez, Per, me a rofe va oll vadou evid kaoud eur verh evel Mallt, da zerhel urz em zi.

Per

N'ouzon ket perag, neuze, n'out ket bet dimezet pa oas yaouank eveldon ! Heñvel out ouz pelikan ar gouzeri, atao e-unan, heb den tostoh dit egedon ha Mallt. N'ez-peus nemed diavêzidi en-dro dit. N'ouzon ket perag n'out ket bet dimezet pa oas yaouank eveldon.

Nath

(o pleustri)

Brao eo dit komz evel ma rez ; daoust m'om bet mignoned vad a- oll viskoaz, ne ouezez ket pep tra diwar va fenn.

Per

(goude beza chomet sioul eur pennad)

Ne ouezan ket petra ez-peus c'hoant da lavared.

Nath

C'hoant am-eus da lavared ne ouezez ket perag on chomet dibried.

Per

Penaoz e oufen ? N'eus droug ebed, goude m'her hlevfen ?

Nath

Nann ! ha koulskoude em-boa lakaet em spered n'em-bije biken diskuillet ar huzulig-se da zen. Klev ganen ; biskoaz n'em-eus greet al lez nemed d'eur verh yaouank hag, en toull tosta, on bet da gaoud he ger.

Per

(o selaou evel unan hag a oar ar respont emaer o vond da ober dezañ)

Piou e hellfe beza hounnez da vihannañ ?

Nath

Marharid, da wreg. *(rei a reont peoh)*.

Per

(gorreg)

³ feh : ? . E feiz ?

O klask he haoud edos ivez 'ta neuze, pa zimezis-me ganti ?

Nath

Ya ! ya !

Per

Maharid a ouie he haries ?

Nath

Heb mar ebed, peogwir he goulennis da zimezi.

Per

Ha neuze ?

Nath

Re ziwezdad e oan en em gavet ; daou zezev a-raog he-doa he ger dit.

Per

Ha n'he-deus lavaret netra ebed dit diwar va fenn ?

Nath

Kempennig em-eus bet va zah diganti ; gouezet he-deus trei brao-braz he homzou evid rei da houzoud, heb va feuki, e oas an hini a oa en he goulou ha me an hini... ne dalveze netra !

Per

(goude beza chomet sioul eur pennad)

Sell, stard va dorn, Nath ; beb an amzer e vez tabut ganeom p'en em gavom on-daou, med hiviziken, ne zavo trouz ebed kenetrezom ; ni a en em garo gwelloc'h eged biskoaz.

Nath

Bremañ, sell, e ouezez kement tra a heller gouzoud diwar va fenn. Med, en an' Doue, komzom euz eun dra bennag all en aon ne deufem da veza heñvel on-daou ouz eur hoz torch gleb. Deom da hoari eur pennadig, ma kerez, Per ?

Per

Ya ! greom eun taol pe zaou da hortoz koan. *(Renka a reont an itronezed war an daolenn vriz ; azeza a reont unan a bep tu d'an daol, an eil dirag egile ; lakaad a reont o lunedou o kemered o amzer hag e weler Mallt o selled outo, diwar dreujou he hegin, heb lavared ger).*

Nath

Ped gwech om bet on-daou oh ober ar c'hoari-mañ abaoe ugent vloaz m'om deuet da veza diouz on danvez ?

Per

Meur a gant gwech, da nebeuta !

Nath

Eur herse eo e teufem da gosaad, evel ma reom ; dizale e stoko va fri ouz va helgez. Din-me eo ar re zu ha din-me eo ar c'hoari kenta.

Per

Nann ! nann ! nann ! Te, - me n'em-eus ket hen ankounac'haet, - eo ez-poa ar re zu, en derhent deh, hag a hoarias da genta. (*Mallt a deu harp enno heb beza gwelet ganto*).

Nath

A ! nann avad, Per ; te eo a hoarias da genta ha din-me eo hen ober en abardaez-mañ.

Per

Fazia a rez, heb mar ebed.

Nath

N'eo ket me eo a fazi ; te eo her gra ! Meur a dra a zo hag a nij evel-se, diwar da spered, dillo !

Per

(*tomm et dezañ*)

Petra, te ez-pefe c'hoant da lavared eo divouedet va fenn ! Mad, n'eo ket c'hoaz, a drugarez Doue, ha te eo an hini a ankounac'h an traou, kalz muioh egedon-me.

Nath

Mar deo evel-se eo e c'hoarvez, perag 'ta ne ouezez ket eo din-me da hoari da genta, fenez ?

Per

(*droug ennañ*)

Perag e rankez lavared heñvel atao, evel eur ran ; en hent-se edos ivez bremaig gand da Roue Arzur ha da Zan Domingo ; n'out nemed eun torpenn...

Nath

(*entanet ivez*)

Ha te ? Te a zo evel eur voutailad gwin Champagn a rank tarza d'an disterra tra a stoker outi. A ! ya ! Mond a ran ahann gand ar gounnar.

Mallt

(*en he sao, heb ma vijed ouz he gortoz da gomz*).

Gortozit ! gortozit ! kabiten Nath !

Nath

(*o sevel buan, eun tamm spontet*).

Va sponta az-peus greet, avad, en taol-mañ, Mallt !

Mallt

Penaos 'ta ?

Nath

N'edon ket ouz da hedall aze ha koulskoude pa'z klevan e kav din e klevan mouez da vamm pa oa plah yaouank.

Mallt

Med n'eo ket an dra-ze hepken eo ; aze eo dare koan ; kabiten Nath, it, dre amañ, d'ar
gegin ha c'hwi kabiten Per, troit ho stur war-zu ar gwalarn.

(An daou gabiten a ya er-mêz ha Mallt d'o heul, endra ma kouez ar gouel).

Plougerne, 7 a viz Eost 1928.